

## Lid 400<sup>vet</sup> niverenn Al Liamm e Karaez da geñver Gouel Levrioù Breizh d'ar Sadorn 26 ha Sul 27 a viz Here 2013

Kaerat degouezh evit bodañ lennerien,  
koumanterien, kenlabourerien,  
skrivagnerien a bep oad hag a bep bro en-  
dro d'hor c'helaouenn !

Gant plijadur e pedomp an  
holl da zont betek Karaez ha  
da gemer perzh en abadennoù  
hag oberezhioù liesseurt  
kinniget a-hed an daou zevezh.



© AGK 2012



### **Sadorn 26 :**

- 15 eur : Diviz hag eskemm war istor *Al Liamm*, ar gelaouenn hag Europa e leurenn ar c'helaouiñ.
- 16 eur : Kinnig ha disoc'h ar Prizioù. Priz Langleiz, Priz an danevell vrezhonek gant Kêr-Garaez ha Priz an danevell evit 400<sup>vet</sup> niverenn *Al Liamm* (dodenn ar sifr 400 pe an deiz-ha-bloaz). Leurenn ar c'helaouiñ.
- 17 eur ha 17eur45 : Skignadenn ur Im bet savet e 1972 gant Per-Jakez Helias diwar-benn Ronan Huon, skrivagner ha rener *Al Liamm* d'ar mare-se. Er sinema.

### **Sul 27 :**

- 11 eur : Diviz hag eskemm diwar-benn *Al Liamm*, al lennegezh gant perzh CRBC Roazhon2 hag izili skipailh *Al Liamm*. Er sinema.
- 11:45 : Banne digor-kalon war stand *Al Liamm*.
- 12:30 : Pred asambles gant mignoned *Al Liamm* (er sal-debriñ dindan ar sal vras, 12 euro). **Ret eo enskrivañ dre ret a-raok an 10 a viz Here.**
- 14:30 betek 16:30 : Maraton lenn. Kement hini a c'hell dont da lenn ur pennad dibabet gantañ er skridoù bet embannet gant *Al Liamm* (barzhoneg, danevell, istor, kontadenn...)  
Pep lenner a c'hell lenn e-pad 3 munutenn (ur bajennad d'ar muiañ). Digor d'ar vugale gant ma vint ambrouget gant o zud. Leurenn ar c'helaouiñ.  
**Enskrivadur ret a-raok an 10 a viz Here** evit gellat aozañ ha reiñ plas d'an holl (anv ha oad al lenner, daveoù ar pennad dibabet).

*Diskouezadegoù ha stand levrioù Al Liamm a-bed an daou zevezh war stand Kuzul ar Brezhoneg*

